



Landerne, d'an 28 a viz Du 2022

H.D : 2022MEL038/YU.DJ

Abeg: keloù diwar-benn strategiezh diorren Diwan
Information sur la stratégie de développement de Diwan

Keneiled ker,

Lakaat a ra mennad kendalc'h Diwan 2021 war wel ma vo lakaet ar bec'h war diorren ar rouedad. Pal ar mennad se eo henchañ Diwan evit ar prantad 2021-2023.

Ouzhpenn da se e oa bet sinet d'ar 15 a viz Meurzh gant ar ministr kentañ, prezidant ar Rannvro hag ar prefed rannvro ur feuremglev ispisial evit treuzkas yezhoù Breizh, ennañ ur stern nevez d'ar Stad ha d'ar Rannvro evit treuzkas ar brezhoneg en deskadurezh divyezhek gant ar pal «tremen eus 19 000 bugel e 2022 da 30 000 e 2027 a drugarez da ledañ (...) lec'hiennoù deskadurezh divyezhek gant an tri rouedad, publik, prevez ha kevredigezhel Diwan ».

Uhel eo ar pal 30 000 bugel se, ret eo avat evit dazont ar brezhoneg, hor mad boutin. Bez e rank Diwan kemer perzh.

E meur a zoare e c'hell hon rouedad mont war-raok. Da skouer o souten ha kreñvaat ar skolioù a zo anezho. Atalieroù vo da geñver emvodoù ar rouedad : Kuzulioù ar skolioù, devezhioù eskemm, emvodoù meur ha kendalc'hioù, evit rannañ mennozhioù ha sevel ostilhoù evit ar skolioù.

O sevel skolioù nevez ivez e c'heller mont war-raok.

Labouret hon eus neuze gant Ofis Publik ar Brezhoneg evit diskoachañ takadoù e lec'h m'emañ an traoù war o zu evit ar skolioù hag e lec'h ma ra ar skolioù brezhonek diouer.

A-benn un nebeud devezhioù eta emamp o vont da gelaouiñ dre ar c'hazetennoù en takadoù divizet ganeomp, a-raok skrivañ d'un nebeud maered ha maerezed evit dont a-benn da gaout eskemmoù mat da lakaat raktresoù da ziwan.

Sed aze ar broioù e lec'h m'emaomp o vont da labourat : bro Sant Brieg, bro Loudieg, bro Douarnenez, bro Pont n'Abad, bro Vrest, bro Sant Maloù, bro Gwitreg, bro Roazhon, bro An Oriant, bro Gwened pe c'hoazh bro Gwern-Porc'hied.

Dre ma 'z eo bras an niver a raktresoù e Liger-Atlantel (Naoned Chanzy, Gwiniég Breizh, Sant-Sebastian-an-Enk ha Savenneg da solutaat) hon eus divizet chom hep lañsañ an ober-mañ eno evit poent.

Ouzhpenn da se e chom ar rouedad prest da respont da c'houlennoù danvez-kerent a garfe digeriñ ur skol tost ouzh ar gêr ha prest ivez da sikour ar skolioù a zo diouto evit diorren ha solutaat o mont en-dro.

Kontañ a reomp warnoc'h evit souten an diarbennoù-mañ. Evel just e chom ar servijoù, ar c'huzul merañ, ar burev ha me prest da eskemm ganeoc'h war se.

* * *

La motion votée en Congrès en 2021 et fixant les orientations stratégiques de Diwan pour la période 2021-2023 met notamment l'accent sur le renforcement du développement du réseau.

Par ailleurs, le 15 mars dernier, le Premier ministre, le Président de Région et le Préfet de région ont signé la convention spécifique pour la transmission des langues de Bretagne dans laquelle l'Etat et la Région entendent donner un cadre nouveau à la transmission du breton et à l'enseignement bilingue avec l'objectif de "passer de 19 000 élèves en 2022 à 30 000 en 2027" grâce à un "déploiement (...) des sites d'enseignement bilingues dans les trois réseaux, public, privé et associatif Diwan".

Cet objectif de 30 000 élèves est ambitieux mais nécessaire pour l'avenir de notre bien commun qu'est la langue bretonne, et Diwan doit y prendre sa part.

Le développement de notre réseau peut prendre plusieurs formes. Le soutien et la consolidation des écoles existantes en font partie. Cela donne lieu à des ateliers lors des différentes rencontres du réseau, conseils des écoles, journée d'échanges Devezh Eskemm, AG et congrès, permettant de réfléchir collectivement sur les missions et outils nécessaires aux établissements.

Le développement passe également par l'ouverture de nouvelles écoles.

Dans ce cadre, nous avons travaillé avec l'Office Public de la Langue Bretonne pour identifier les territoires où le potentiel scolaire est important et la présence d'enseignement en langue bretonne limitée.

Nous allons donc, dans les prochains jours, communiquer dans la presse sur ces premières zones de prospection qui ont été identifiées, avant d'écrire à un certain nombre de mairies pour solliciter des rencontres avec pour objectif de faire germer de nouveaux projets.

Les zones identifiées sont les Pays de Saint-Brieuc, Loudéac, Douarnenez, Pont-L'Abbé, Brest, Saint-Malo, Vitré, Rennes, Lorient, Vannes et Guer.

Le nombre de projets étant assez important en Loire-Atlantique (Nantes Chanzy, Vigneux-de-Bretagne, Saint-Sébastien-sur-Loire et conforter Savenay), nous avons fait le choix de ne pas initier de sollicitations similaires à ce stade.

En parallèle, le réseau reste à l'écoute des sollicitations de futur.e.s parents intéressé.e.s par l'ouverture d'une école près de chez eux/elles et accompagne les écoles existantes dans leur développement interne permettant de consolider leur fonctionnement.

Comptant sur votre appui dans ces démarches, les services, le conseil d'administration, le bureau et moi-même restons évidemment disponibles, pour tout échanger sur le sujet.

Gant va gwellañ soñjoù.

Yann Uguen,
Prezidant Diwan

